




Me glev ma dous o c'hwitellat 9



Me glev ma dous o c'hwitellat 'n eur lakat an



dour war brad e dad, 'n eur lakat an dour war brad e



dad.

1. Me glev ma dous o c'hwitellat  
'Neur lakat an dour war brad e dad.
2. En eur lakat dour war e brado,  
O ya, me 'garfe bezañ eno...
3. Tremenet an hañv, arru ar goañv,  
Na me nan on bet o pardonañ
4. Me yelo da bardon ar Follgoad  
Da gomuniañ, da gofesaat.
5. Pa oan o vonet gant an hent,  
Naig Douval a rankontren.
6. " Bet e oa ganeoc'h eun amzer  
Hag am gortozjec'h en ho keñver  
En eur beilhat avaloù pe ber.
7. - An amzer-se, emei, 'zo tremenet,  
Me 'zo bet laket er valañs ha pouezet,
8. Ha gant ho tud laket ken dister  
Ma nan hellan mui, ma servijer "...
9. Me a wel ma dous war vur ar Follgoad  
hag e zilhad 'zo liw ar gwad.
10. Me 'ya da bediñ ma Doue  
'Vit ma tiskenno ac'nane "
11. Ne oa ket he gir peurachuet  
War e benn d'an trañ ez eo kouezhet.

Kanet gant Maria ROUZ, pried A.MASOÏN,  
Kergrist, Ploubêr, 22/7/52.